

Aotrou Sant Millio benniguet,
Warlerc'h hon tadou ni ho ped :
Diwallit parrez Ploneve,
Dalc'hit ar feiz start e Kerne.

Hon diwallit 'vel hon tud koz
Ha ni a gano deiz ha noz :
« Nag en nenv na war an douar
Sant Millio n'en deus ket e bar. » (5)

(1) Grallon a varvas wardro ar Bloaz 505. (La Borderie, Hist. de Bret. kenta leor, p. 325).

(2) Millio a voe roue 7 vloaz, betek ar bloaz 538. (La Borderie, Hist. de Bret. kenta leor, p. 376).

(3) Ar Yoded pe ar C'hoz-Yoded : kêr eskob gwechall goz, war ar ster Leger, er c'huz-heol da Lanuon, dismantret gant an Danmarkiz er bloavezh 836 ; hirio e parrez Ploulec'h.

(4) Eur micherour gouizieq a lakeas da Velarig eun dorn arc'hant hag eun troad arem ; dre vuzud dorn ha troad a greskas da heul an izili all, ken na laboure ar pôtrig ganto kouls ha gant izili beo. Brao 'vo d'ezan pignat war varch ha c'hoari ar c'hleze.

(5) Sant Millio a zo c'hoaz patron Ploumillio, e eskopti Treger ; Plumelio, e eskopti Gwened, ha Gwimillio e eskopti Leon.

Araok an Dispac'h vras (1793) e veze grêt gouel ar Zant e Ploneve d'an eil devez a viz here, evel eur gouel berz ; goude Emgleo Napoleon koz hag ar Pab Pi VII, d'ar bevare sul a viz gwengolo ; abaoe ar bloavezh 1833, e vez grêt d'an eil zul a viz eost evit delc'her sonj eus Breuriez sant Lorans.

Pedet 'vez sant Millio diouz ar goriou hag an heskedi.

J. TH.

Quimper, le 2 août 1944.

IMPRIMATUR :
A. MOENNER,
Vicaire général.

8N2-3-028

GWERZ an Aotrou SANT-MILLIO

Roue KERNE (530-538),

patron PLONEVE-PORZE

1

E Kerne pemzek kant vloaz' zo,
Eur zant a rene kaer ar vro ;
Skedus dindan lagad Doue
'Oa Kerne gant Millio roue.

Diskan

Kanomp, kanomp gant levezeg
Sant Millio, patron ar barrez,
War an douar roue Kerne,
En nenv difennour Ploneve.



2

Prestik goude maro Grallon (1)
E pignas Budig war an tron.
Budig an doa bet daou vugel
Ha ne oent tamm ebet henvel.

3

Daou bôtr yaouank en doa Budig,
Dishenvel, n'eo ket eun tammig :
Millio, den a zoujans Doue,
Rivod avius, didrue.

4

Millio, roue warlec'h e dad,
A glaskas beza roue mat,
Mignon d'an holl hag aketus
Da lakat Kerneviz eurus.

5

Epad seiz vloaz 'voe war an tron, (2)
Leun a feiz, izel a galon,
Tad ar beorien, ar vinored,
Difenmour an intanvezed.

6

Nag arne na gwall-wrez en hanv,
Na glao nag erc'h na skorn er goân:
Bemdez peuz-tomm ha glizenn drus,
Seiz vloaz dioustu eostou founnus.

7

Ken na lare, souezet, an dud,
Ha mēz a vreiz 'redas ar vrud:
E Kerne furnez ar roue
'Denn war ar vro bennoz Doue.

8

Rivod avat 'zeve noz-de,
C'hoant ruz gantan beza roue;
Paourkēz Millio 'voe dibennet
Gant e vreur hep truez ebet.

9

Bras ha bihan e voe rannet
O c'halonou gant an torfed.
« Lazet ar zant, kollet hon tad!
Kerneviz, pebez kalonad! »

10

Korf ar roue a voe douget
Da iliz-veur ar Yeoded; (3)
Kerkent burzudou war e vez
A ziskouezas e zantelez.

11

War hent Rivod 'jom eur pôtrig,
Mab Millio hanvet Melarig.
Rivod 'droc'h d'ezan dorn ha troad.
« 'Velse war varc'h n'hello pignat. »

12

« Rivod fallakr, manket ho taol,
Gant Mestr an nenv e rankot koll:
Dorn ha-troad nevez Melarig (4)
A gresk evel askorn ha kig. »

13

Droug ruz ennan, Rivod a lar:
« Roue biken ne vo Melar. »
Gant arc'hant muntre'r 'zo kavet
Hag e Lanmeur ar pôtr lazet.

14

Siouaz! digouezet e Kemper,
En eun tad e varv ar muntre'r.
Rivod, spontet gant ar c'helou,
A gouez dindan falc'h an ankou.

15

« Dorn Doue, a zonj mad ha fall,
O kleot c'hoarvezet kemend-all,
Dorn Doue 'sko, an nenv a lar:
Sant eo Millio, sant eo Melar. »

16

Merzer ar mab, merzer an tad,
En nenv hon alvokaded mat,
En hon iliz eoc'h an aoter
'Zo 'vito bep a daolenn gaer.

17

Sant Millio, lazet dre 'n avi,
Sarrit d'an tech-se dor hon ty,
Lakit ar garantez da ren
Bepret etouez ar gristenien.